

# CANTIC

EN ENOR

## DA SANT JOSEB

Var ton : *Santez Mari... pe : Nijit, El mad...;*  
 pe : *C'est le mois de Marie.*

DISKAN.

Sant Joseb, pried Mari,  
 Tad maguer da Jesus,  
 Ni fell d'comp hoc'h enori,  
 Patroun carantezus.

Mirer choazet gant Doue  
 D'he Vap ha d'ar Verc'hez,  
 Bet hoc'h euz en ho pue,  
 Anken ha levenez.

Evit diguemer Jesus  
 N'hoc'h euz na tân, na ti;  
 Ho calon so evurus  
 O tont d'Hen adori.

Pa glask Herodez Jesus,  
 D'Hen lakât d'ar maro,  
 Gant pebez feiz burzuduz  
 Hen cassit da bell-bro!

Pebez poan! epad tri deiz  
Jesus a so collet;  
Goude pebez levez!  
Jesus hoc'h euz cavet.

Ho labour en deuz maguet,  
Ho Crouer, Map Doue;  
En he labour Mestr ar bed  
Ouz-hoc'h-hu a sentè.

Var an douar trubuillet,  
C'hui brema en envou  
A so gallouduz meurbed,  
Roit d'in ma goulennou.

Jesus a bleg d'ho peden  
Hag he Vam, ho pried;  
Eur c'hraç am euz da c'houlenn,  
Eur c'hraç d'in goulennet.

Pa vin galvet gant Doue,  
*Patroun ar maro mad,*  
Deut, gant eun dourn a drue  
Serrit ma daoulagad.

Tost d'eoc'h ha tost da Vari  
E quichen trôn Jesus,  
Ra z'in en env d'ho meuli,  
Ma fatroun evurus!